

# SON AR VESAEREZ <sup>(1)</sup>

## Sonnenn er Vugulez

*Allegretto,* *ritard.*

Di-sul vin - tin vel ma sa - ven, ho! Di-sul vin - tin vel ma sa - ven, Eur vouez dous a gle - ven, e - lon la Eur vouez dous a gle - ven, ho!

1  
 Disul vintin 'vel ma saven. Ho!  
 Disul vintin 'vel ma saven  
 Eur vouez dous a gleven, elonla!  
 Eur vouez dous a gleven, ho!

2  
 Eur vouez a gleven o kana  
 War lez ar c'hoat tosta, elonla!

3  
 Eur vouez bravoc'h ne c'heller ket  
 Klevet e bro ebet, elonla!

4  
 Vit kana kaeroc'h ne 'z eus ket  
 Met an eostig er bed, elonla!

5  
 Ha me diskenn warzu 'n draonlenn  
 Da zelaou ar zonnenn, elonla!

6  
 Hag e kreden 'oa eur zon goz  
 A gleven war ar roz, elonla!

7  
 Hag el lannok, dre ma kerzen,  
 Bleuniou a gutnuilhen, eonla!

1  
 Dé sul vitin, èl ma saüen, ho!  
 Dé sul vitin èl ma saüen,  
 Ur voéh dous e gleuen, élonla!  
 Ur voéh dous e gleuen, ho!

2  
 Ur voéh e gleuen é kannein  
 E sol er hoed sapin, élonla!

3  
 Ur voéh brañoh ne hellér ket  
 Kleuet é bro erbet, élonla!

4  
 Eit kannein spisoh nen ðeş chet  
 Meit en estig ér bed, élonla!

5  
 Dichennet em es bet ér noed  
 Eit cheleu er sonnen, élonla!

6  
 Ur sonnen geh, kredein e hren  
 E beg ur vugulez, élonla!

7  
 Ha dré er lann èl ma pasen.  
 Boketeu é cherren, élonla!

(1) E galleg : *la chanson de la bergère*. Lakat a reomp ar zon-man e yes. Leon hag e yez Gwened : gwelad a-reoc'h evelsa n'eus ket kement-se a gemm-etre ar yezou brezonek hag a-bouez digas muioc'h mui a unvaniez etrezo, ar Vretoned a-deuio hag a-vezo gouest d'en em gle et brao bras eus an eil penn d'egile da Vreiz.

8  
Bleun ruz, a vriad, ha bleun glas,  
Ha bleun aour al lann vras, élonla!

9  
Evit o rei, o c'hutuilhaen,  
D'an hini a gleven, élonla!

10  
Ouz ar c'hoat, seul-vui ma tostaen  
He c'hlevet gwel a raen, élonla!

11  
Met allas! he c'hlevet a raen  
Heb kompren he sonnenn, élonla!

12  
Eur sonnenn deut euz a Vro-C'hall,  
Gant eun trouc'her segal, élonla!

13  
Kerkent bokedou ruz da glas  
Eus va dourn a gouezas, élonla!

14  
Rak va bokedou ne d'int ket  
Vit eur verc'h ken desket, élonla!

15  
Vit nijal war eur vouez hep par,  
Ne z eus met eul lavar, élonla!

16  
Lavar hon Tadou, Bretoned  
Ar skanva zo er bed, élonla!

Job ar Glean.

8  
Boketeu ru, boketeu glas,  
En eur ag er lann vras, élonla!

9  
Ou cherrein e hren-eit ou rein  
D'en hani e gleuen, élonla!

10  
D'er hoed a vuzul ma tosten  
E hleuet guel e hren, élonla!

11  
Mes allas! hé hleuet e hren  
Hemb kompren hé sonnenn, élonla!

12  
Ur sonnenn deut ag er Vro-Gal  
Get un trohour segal, élonla!

13  
Kentéh boketeu ru ha glas  
A men dorn e goéhas, élonla!

14  
Rag men boketeu nen dint ket  
Eit ur verc'h ken desket, élonla!

15  
Eit nijal ar ur voéh hemp par  
Nen des meit ur lavar, élonla!

16  
Lavar hun tadeu, Bretoned,  
Er skinvan ag er bed, élonla!

Job er Gléan.



**MISION LOKOURNAN.** Epad ar mision a vezo roet e Lokournan, e miz c'houevrer, a vezo kavet da brena e stal **Emgleo Sant Ildut**, e ti Mme Le Treut, ru an Iliz, **Levriou oferenn an A. Uguen** (a bep priz ez eus anezo).

**Christo** ha **Buhez ar Zent**, daou levr da Ienn diouz an noz, Kantikou brezonek hag a bep seurt levriou all.